

Kantik Santez Veronik.Var don Kantik Sant Pol.

## DISKAN :

Santez Veronik, ni ho ped,  
 Goulennit evidomp bepred  
 Ar c'hraas ma vo imaj Jezuz  
 Merket ennomp sklær ha padus.

Jezuz goal zammet he ziskoaz,  
 Poan ganthan o tougen he groaz,  
 A gav, var hent mene Kalvar,  
 Kalonou rannet gant glac'har.


Etouez an nebeud diskibien  
 A vel Hor Zalver o tremen,  
 Ema, he c'halon glac'haret,  
 Santez Veronik beniget.

Pa vel bizaj santel Jezuz  
 Sotret en eur feson heuzuz,  
 Pa vel eo leun a granch, a voad,  
 Evithj pebez kalonad !

Raktal, a-dreuz ar vourrevien,  
 Ganthi 'n he daouarn eul lien,  
 Ouz Hor Zalver e kred tostât,  
 Ha sec'ha 'ra ar c'hranch, ar goad.

O kaera burzud ! Hor Zalver  
 Anaoudek mad en he c'henver,  
 A lezas ganthi he boltred :  
 Var al lien e oa merket.

Vel ar Veronik, ouz Jezuz  
 Dalc'homp da veza truezuz ;  
 Ha dezhan, pa vo blasfemet  
 Kinnigomp merkou a resped.

Dirag enebourien Doue,  
 'Vel Santez Veronik ive,   
 Heb aoun na mez, savomp hor  
 [peñ ;

Anez, n'omp ket guir gristenien.

O Veronik, miret 'fell d'in  
 Em c'halon ar skeuden divin ;  
 Dre ho peden, grit ma chomo  
 Ennon beteg heur ar maro.

Jezuz, hoc'h henvedigez  
 A vezo va zilvidigez ;  
 Ia, gant hoc'h imaj em ene  
 E kavin dor zigor en Ee.

Santez Veronik, roit skoazel  
 D'ar re ho ped en ho chapel ;  
 Grit ato hervez ho goulou  
 D'ar re ho ped euz an derzen.

Ha dreist pep tra, deut d'hon diouall  
 Euz goal derzen an techou fall ;  
 Hor zikourit hed hor bue  
 Da viret yec'hed hon ene.